

114

Nnn 5

Kazetenn viziek evit ar vugale : miz Ebrel 1984.







Savet eo bet an
niverenn-mañ gant :
Agnes SIMON
Pascale CHEVILLARD
Marivon BERR
Martial MENARD
Joelle PERROT
Michèle BEVER
Denez HAEL
Guy BIDEAU
Yann SIMON
Daniel DOUJET

taolenn

- Un istor lapined . p.3
- An daou jibesaour eskimo . p.4-5
- E bro al loened marzhus ha farsus . p.6
- Ur c'hoari gant lokañ . boutailh . p.7-8
- C'hoarioù a bep seurt . p.9-10-11
- Beromp fur doujomp d'an natur . p.12-13
- Kozuz Begoulipus . p.14
- Emil ar c'hrokedil . p.15
- Gant va daouarn . p.16
- Diskoulm ar c'hoarioù . p.16

un istor lapined



AN DAOU JIBOESAOUR ESKIMO

Ur wezh e oa daou jiboesaour Eskimo a veze dalc'hmat e tabutal :

- Me eo gwellañ jiboesaour ar gêriadenn !

- Pas ! Me eo !

Un deiz e lazhañ ar c'hentañ jiboesaour ur c'haribou hag an eil ur bleiz.

Ar c'hentañ jiboesaour da lâret neuze :

- Gounezet em eus ; me eo ar gwellañ jiboesaour : ar c'haribou a zo muioc'h a gig doc'htoñ.

Hag an eil jiboesaour da respont :

- Pas ! Me eo, peogwir em falloc'h ar bleiz evit ar c'haribou.

- Ar c'haribou a zo kern hir war e benn.

- Lemmoc'h eo dent ar bleiz.

- Muioc'h a vlev a zo war gein ar c'haribou

- Pas, ar c'hontrol eo, just a-walc'h.

Setu an daou jiboesaour ec'h azeziñ ha doc'h en em lakaat da gontañ :

"Unan, div, teir blevenn... nav, dek, unnek... peder blevenn ha tregont... kant daouzek... mil...".


E kontiñ e oant dec'h

E kontiñ emant hiziv


E kontiñ e vint warc'hoarzh



E bro al loened marzhus ha farsus




moutig
ar rugbisig
n'eo ket chomet da straniñ
war an dachenn-c'hoari:
war e lerc'h e cant tregont
o redet war al beton.



gwendal
an dreme-dall
a son gant an akordeoñs
bep merc'her
war marc'had Kemper


Rodrig
ar spagetigr
en-deus lonket
ur fourchetez
leun a lipig-tomatez



C'hoari get tokoù-boutailh...

Da gentañ-tout ema ret kavout tokoù boutailh.
Kaset e vezont aes dre ma vez toket gete hogos
an oll evajoù paket e boutailhoù bihan ; bier,
grog-frouezh, dour-pik hag all...


anv ar redour
(pe ar jav)



Hervez da c'hoant e teuint da vout redourion, roñseed pe kirri.
Penaos e teu un tok-boutailh da vout karr, jav pe redour ?
Didroc'het e vez un tamm paper, brasikoc'h evit an tok ha lakaet
e-barzh ur wezh merket arnezhoñ anv ur redour pe heni ur jav.

Evit ar redourion :

O rummiñ a c'hellez a skipailhoù,
da bep heni anezhe e liv, ar re c'hlas,
ar re ruz, ar re velen...



da-unan pe get kamaraded, da bep unan neuze da gas e dammig
skipailh ar-raok.

Treset e vez an hent e-barzh an traezh pe àr an douar. Bravoc'h ha plijusoc'h a galz e vez pa vez kemeret amzer da fardif pontoù bihan, ribouloù strizh, krapadennoù tenn, devalennoù badaous ha kammdroiennoù treitour ! Neuze e ranker diwall a vont d'ar fozell !

Un nebeut lezennoù a zo ret :

- Da gentañ merkif splann ur ritenn a vo penn-kentañ ha dibenn ar redadeg.

- An heni a ya er-maez ag an hent a zeu d'e blas en-dro.


- Ar re a vez paket gete un dro dale a vez lakaet er-maez ag ar

c'hoari.


Hag eveljust diferif spis en a-raok pet tro a vo d'ober ; unan, div, teir pe dek ?

Farsusoc'h 'vez c'hoazh pa vez savet trapoù àr an hent ; toulloù, poulladoù-dour... ha gwa d'an heni a gouezh e-barzh : echu eo an droiad evitof !

Setu ur c'hoari na goust netra, nemet ar blijadur da lipañ bannigoù chug-frouezh war zigarez dastum an tokoù anezhe.





8




- Du □ Ruz
- + Glas | Orañjes
- △ Melen - Gwer
- Louet

Gwilhou ! Gwilhou !
Sell 'ta piv !
Kemer da greionoù
ha dicuzhomp e veli al liv
hag ar vioù !!!

9




Pegen sioul eo ar c'hornig-bro-mañ !
M'hoc'h eus daoulagad lenn ha pizh, e kavot
memestra ez eus cheñchamantoù bras eus an
eil skeudenn d'eben.
SELLIT MAT !!!



bezomp fur... doujomp d'an natur!



Klask e miz meurzh hag ebrel gwele raned (un nebeut vioù ran) pe dri pe bevar penndolog evit o lakaat en ul lestr-peskad. Hemañ a rank bezañ e-barzh ur sal sklaer met pas dindan an heol. Cheñch an dour pa grog da flaeriañ.



Ar penndologed a zebr plantenoù. Ro dezho tammoù kiq kriz (adalek an eil sizhun) ha cheñch anezho bep eil devezh. Ur wech deut da vezañ raned e lakai anezho endro er poull-dour e-lec'h 'peys kavet anezho.

12


- ① Emañ ar par o c'hragal 'vit gervel ar barez. Ur sac'h-mouezh a gresk a beo tu d'e c'henou.



gwele raned


- ② Bez e c'hell ar ran dezviñ betek 4000 vi.
Neuial a reont war an dour.

- ④ En em stagañ a reont ouzh ur blantenn en ur zont er-maez eus o vi.



- ③ Ar penndologed a gresk er vi hag a zeu er-maez 10 devezh goude.

- ⑥ Da 8 sizhunvezh e vez gwelet ar pavioù a-dreñv o kreskiñ.



Adal ar pevare devezh int gouest da neuial.

Da 10 sizhunvezh e vez gwelet ar pavioù a-rank o kreskiñ

13




Kornig Begoulipous

- Petra 'po Begoulipous ?

- Madigoù !


Goulenn gant da vamm prenañ toaz alamandez gwenn, roz ha gwer, rezin sec'h ha sukr poultr.




Kemer tammoù toaz alamandez hag ober bouloù ganto, bras evel ur gerezenn.



Sankañ ur rezinenn sec'h war bep boul.



Lakaat ar sukr war ur plad ha ruihañ brav ar bouloù ennañ betek ma vo peg mat ar sukr tro-dro ar madig.




Renkañ brav ar madigoù war ur plad all hervez o liv ha lakaat er yenerzh e-pad un eurvezh.

Emil ar c'hrokodil ne ral ket bil dindan ar glav pil, pa deuas ferdinant an gotrou olifant, da laerezh e dog ledan.

"pil, pil, pil,
glav pil,
war benn emil"
"lavar ferdinant"

"loen vil"
eme emil
o chaokat gant e zant
lost moan ferdinant.






gant wa daouarn



ur voutailh plastik




fav




kotoñs

lak ur banne dour bemdez war ar c'hotoñs



hag ar fav a ziwano.



Renez ar gazetenn: Joelle Perron
 Nnn CPPAP, Da zont war-lerc'h
 Nnn ISSN: 0760-1085
 Houlet e ti G/CLOITRE GOURMENT N.12 STHOMAN 29220 LANDERNE

An diforc'hioù : 1, ur wezenn ouzhpenn war an tu dehou. 2, an heol zo bet cheñchet plas dezhañ. 3, Ur prenestr ouzhpenn war an iliz. 4, mankout a ra un ti. 5, war un ti all e vank ur prenestr. 6, n'eus mui tamm noget er siminal. 7, ur wezenn zo bet cheñchet bras he stumm. 8, ul labous zo nijet kuit. 9, ur wezenn a vank war an dorgenn a-gleiz, 10, ar goumoulenn n'emañ ket mui er memes plas

Diskoulm ar c'hoarioù ↗



AN HERE
Embannadurioù
evit ar re yaouank

KOUMANANTIT DA CHOLORI
 120^l evit ar bloaz, 90^l evit 6 miz
 100^l adal an eil komanant (familhaù, skolioù,
 leuraouegaù.)
KASIT AR C'HOUMANANT DA
 AGNES SIMON KRECHIENN PLOUIDER 29260 LESNEVEN,
 GANT UR CHERENN GRAET E ANV **AN HERE.**
 16